



# DIEZ EO KAOOUT PEB TRA



Son nevez, savet gant ar barz kastellad Francis MOAL  
(Alc'houeder Leon)

*Tom  
gallah:  
la veine  
en bouteille*

1

Na pebez amzer galet  
Zo warnnomp kwezet,  
Poan a zo e veva  
Vez kavet nentra.  
Kaer a zo furchall, redet,  
Seurt ne vez kavet,  
Ne veler a beb tu  
Nemet marc'had du.

(Diskan)

## DISKAN

Kaer a zo redet e kement tu,  
E pep korn, e vez great marc'had du.  
Diez eo kaout pep tra,  
Andraze ar gwassa,  
Ma roit seurt, c'houi n'ho pezo nentra.

2

Pa zeer ebarz ar staliou,  
Vit penadennou,  
Ouz an den vez gwelet  
Buan vez lavaret :  
Erruet out re zivezad,  
M'euz ken a zilhad,  
Me gay diez, petra ri,  
M'euz nentra em zi.

(Diskan)

3

Kement stal a zo e kear,  
An holl a vel sklear,  
Vez kasset en ho zi  
Traou leun da zebri,  
Neuze a vez dispaket  
An traou ioa kuzet,  
Vit amann, a kig moc'h,  
Traou vo gwerzet deoc'h.

(Diskan)

4

Gant Louisik en deiz all  
Oan e frikotal,  
D'am dousik n'heur jaogad  
Me glaskas pokad,  
Kerkent klevaz anezi  
Eb chom da nec'hi,  
Ma lezan pokad d'in,  
Petric roï d'in.

(Diskan)

5

Eürusamant ar brezel  
Neo ket eternel,  
Dont reio an dervez  
C'hortozer bemdez,  
Pa glevor kleier ar peoc'h  
Me a lavar deoc'h,  
Ar galon a drido,  
A ni a gano.

(Diskan)

## DISKAN DIVEZA

Kaer a vo sellat e kement tu,  
Velor den e c'hober marc'had du.  
Kavet vo peb tra,  
Ne vanko nentra,  
Ag an holl dud a c'hello beva.

(Reproduction interdite.)

Francis MOAL.

1943

B216